



KANOMP



Eun dastumadenn Soniou evit ar Yaouankizou



*Embannet gant Kevredigez « Yaouankizou Kristen ar Maeziou »
Eskopti Kemper.*

(Straed Feunteunig-ar-Lez, Kemper.)

Kemper, Moulerez ru an Dudchentil, 7

RAK - SKRID

Trugarekaat a reomp an oberourien o deus hon aotreet da voula o zoniou. Karout a reont o Breiz ha yaouankizou Breiz ; n'o deus nemet eur c'hoant : gwelet muioc'h-mui ar baotred hag ar merc'hed yaouank troet da gana ha da gana e brezoneg. Aes e ve d'hor strolladon paotred yaouank sevel, da genver ar foarion pe bardoniou, staliou-kana el lec'h ma werzfent an dastumadenn soniou-man.

Ma plij an dastumadenn-man e vo savet eun all hep-date. Goulenn a reomp digant hor mignoned lavarout d'eomp peseurt soniou a garfent e ve moulet en eil levr-se. Mac'h anavezfent soniou diembann o degas d'eomp gant ar sonerez.

Bez' ez eus dastumadennou-soniou all ; set' aman hag a gaver c'hoaz da brena, a gred d'eomp :

Soniou Feiz ha Breiz (TREDE LEVR).

Barzaz ha soniou (PAOTR-TREOURE).

Ugent kanaouenn (TALDIR).

Eun dornad Brug (EVNIG PENN AR C'HOAD).

Ra zeuio maeziou Breiz da veza adarre eur mor a gan !



War zao ! Yaouankiz !

An deiz a darz war lein ar me - nez ;

An An - ge - lus a zon en tour ; Paotred ar

mae - ziou, gant le - ve - nez, Deomp d'ar be -

- denn ha d'al la - bour. Je - zuz ga -


- neomp ni jo - mo nerzus War an e - ro be - tek an

noz. Er bed - man an eost a vo founnus ha

foun - nus oc'h er ^{Diskan} Ba - ra - doz. Yaouankiz, war

zao ! e - vit Je - zuz hor Mestr, hor Zal - ver,

Ba - leomp a - tao war e rou - dou fe - al d'hon



1. An deiz a darz war lein ar menez,
 An *Angelus* a zon en tour ;
 Paotred ar maeziou, gant levez,ez,
 Deomp d'ar bedenn ha d'al labour.
 Jezuz ganeomp, ni 'jomo nerzus,
 War an ero, betek an noz ;
 Er bed-man an eost a vo founnus
 Ha founnusoc'h er baradoz.

DISKAN :

*Yaouankiz, war zao !
 Evit Jezuz hor mestr, Hor Zalver,
 Baleomp atao,
 War e roudou, feal d'hon dever.
 'Vit eost an amzer da zont,
 Labouromp holl, seder, dispont,
 Ha sankomp war zouar Breiz-Izel
 Ar Groaz, hor banniel.*

2. Dreist pep bro karomp bro hor c'havel,
 He douar druz hag he mor glas,
 He c'hoajou hejet gant an avel,
 He menezioù gant o c'hern noaz.
 Koant ha pinvidik eo Breiz-Izel,
 N'eus ket kaeroc'h dindan an nenv ;
 Greomp outi eur vroad tud santel
 Ha bro ebet ne vo ken krenv.
3. E-kreiz o labour gwazed kristen
 A hell bepred beza seder,
 Sevel o mouez ha kana laouenn,
 Evel ma kan an alc'houeder.
 Brevet hor c'horf, dinamm hon ene,
 Arabat d'eomp fallgaloni ;
 Goude koan, dindan lagad Doue,
 E vo levez,ez 'leiz an ti.
4. Bannou ar feiz a vag hor spered
 Hag hon diwall diouz ar gevier ;
 E noz ar bed, bezomp 'vel stered,
 Evit hench,ez tud hon amzer.
 Er park ni oar, da heul an alar,
 Kas hor boemmou betek ar penn ;
 O Jezuz, tre betek an dalar,
 Ni a stourmo 'vit ho tifenn.
5. Kalon ha kalon, tud ar maeziou,
 Ha dourn ha dourn er fealded,
 Gourinomp start evit hor gwiriou,
 Betek viktor al lealded.
 Met an holl 'zo breudeur e Jezuz,
 Ne vern pe seurt eo o labour ;
 Chomomp 'ta bepred karantezus,
 'Kenver an holl, prest d'o zikour.

6. Eun arou-*ez*, liou an esperans,
 A lindr skedus war hor chupenn ;
 D'an holl e lavar splann hor fizians
 Da greski nerz ar feiz kristen.
 War groaz Hor Zalver, pennou gwiniz
 A daol luc'hed melen an aour ;
 Sur e vo, da heul hor sakrifis,
 Eur bed gwelloc'h 'vit an dud paour.
7. D'hor breudeur c'hoaz en denvalijenn,
 D'an dud a jom pell diouz Doue,
 Poaniomp da zigas ar sklerijenn
 A vo talvoudek d'o ene.
 Bezomp ebestel leun a zouster,
 Klaskomp an hent d'ar c'halonou,
 Hag an eost a vo puilh ha pounner,
 Eun eost a zent 'vit an nenvou.

F. GUÉGUEN.

Yaouankiz

Vei ma tarz arbleunioulann Hagar ba . lan; En hor
 c'ha . lon di . bre . der E sav tommder. 'Le'ch amzer gwe .
 -chall E ti . gor eun all E . vit ar bao . tred di . vrall.

Diskan
 Yaou . an . kiz, Yaou an . kiz, Bleun am . zer ne . vez
 'Vit da vreudeur, Breiziz, Klask ar wi . rio . nez . Yaou .
 an . kiz, Yaou . an . kiz, Bo . ked ar vu . hez,
 De . ge . mer ar fran . kiz Leun a le . ve . nez.

DISKAN :

*Yaouankiz, yaouankiz,
Bleun amzer nevez,
'Vit da vreur, Breiziz,
Klask ar wirionez.
Yaouankiz, yaouankiz,
Boked ar vuhez
Digemer ar frankiz
Leun a levez.*

1. 'Vel ma tarz ar bleuniou lann
Hag ar balan,
En hor c'halon dibreder
E sav tommder.
Lec'h amzer gwechall,
E tigor eun all
Evit ar baotred divrall.
2. Hon daoulagad a zo sklêr,
Lemm ha seder ;
An tan a red ken nerzus
En hor gwad ruz.
Kalon divorc'hed
Ha divrec'h kalet
N'o deus ket aon rak bered.
3. Sklêr eo ivez hor spered,
Evel stered ;
Hor c'halon, atao leal,
A zo feal ;
Hep brabanserez,
Met gant karantez,
Ni boagn 'vit ar wirionez.
4. Ni gar an êr yac'h ha mat,
E-barz ar c'hoad,
Ni gar ha mor ha menez,

- Leun a c'hlasvez ;
Hag an heol a sked,
Hag an dour a red,
Ni gar holl draou kaer ar bed.
5. Muioc'h eget an traou mut,
Ni gar an dud,
A-greiz kalon, er glanded,
Gant fealded.
An dud a bep bro
Ganeomp a gavo
Karantez atao bero.
 6. Pa 'z aimp gant an henchou dall,
Lemm hor bouc'hal,
Ni 'ziskaro drez ha spern,
Boued an ifern :
Eur bern gevier koz,
Kalz lapoused noz
Kouezet dindan hor malloz.
 7. Ni vezo soudarded vat,
Kreiz ar stourmad,
Ni vezo gwir ebestel
Betek mervel ;
Ni ouezo dougen,
'Mesk ar gristenien,
Lealded hag aluzen.
 8. Evel eur bedenn nerzus,
Graet da Jezuz,
Hor fizians hag hor feiz krenv
A nij d'an Nenv.
Ho kroaz, o Salver,
'Vel eur siell gaer,
A lintr, feuls, war hon amzer.

Kan-Emzao an Y. K. A. M.

Ar Ga-ran-te 'zo eur bo-ked, Ar
 Ga-ran-te 'zo eur bo-ked, Ar c'haera hi-ni
Diskan
 'zo er bed. — D'an Ti, d'ar Vro ha d'an I-
 -liz, O ni gin-nig nerz hor yaou-an-kiz.

1. Ar Garante 'zo eur boked, (d. w.)
 Ar c'haera hini 'zo er bed.

DISKAN :

*D'an Ti, d'ar Vro ha d'an Iliz,
 Ni 'ginnig nerz hor yaouankiz.*

2. 'Vel eul liorz, kalon an den
 Kalz a vokedou a c'houlenn.
3. Kalz a vokedou karante
 D'e sklerijenna noz ha de.
4. Kenta karantez a vleunio,
 Evit ar Gêr an hini vo.

5. Ar Gêr e-lec'h omp bet gañet,
 Ti hon tad hag hor mamm garet.
6. An douarou 'zo bet gwechall
 Glebet gant an dour diouz o zal.
7. Ar peb gwella eus o amzer
 'Zo bet er park war o Micher.
8. Paotred yaouank, dalc'homp d'ar Ouenn,
 Dalc'homp d'ar Vicher da viken !
9. 'Gant an Douar ar c'horf bemde
 A glask aluzen ar vuhe.
10. Hag eur gwele da ziskuiza
 Pa sono an eur diweza.
11. D'eur vamm ker mat, ar vugale
 A vago karantez ive.
12. Gwella korn douar eus Bro-Frans
 Eo Breiz-Izel hep douetans.
13. Hag e Breiz ma klasket gwazed
 War ar Maeziou deut d'o c'herc'het
14. (Ha Bro-Leon) Ha Bro-Gerne e Breiz-Izel
 A c'hellfe dougen ar banniel.
15. Paotred, savomp eta hor penn
 P'hon eus seurt enor da zougen.
16. Met dreist pep tra karomp Doue,
 Bezomp d'ezan korf hag ene.
17. Ha heuliomp mat betek mervel
 Lezenn fur an Iliz Santel.

DA ECHUI

Ato gwir gristen, gwir Vreton
 Ha Karantez 'leiz ar galon.

F. MÉVELLEC.

Bro-Goz ma Zadou

Moderato

Ni Breiziz a galon, karomp hor gwir Vro! Bru-
 .det eo an Arvor dre ar bed tro-dro, Dispont'kreiz ar-
 brezel, hon tadou ken mat A skuilhaz e vit hi o
 Diskan
 goad. — O Breiz! Mabrol me gar ma bro; Tre ma vo'r-
 mor'vel mur'n he-zro, Ra ve-zo di-gabestr ma bro!

1. Ni Breiziz a galon, karomp hor gwir Vro!
 Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro!
 Dispont'kreiz ar brezel, hon tadou ken mat
 A skuilhas eviti o gwad.

DISKAN :

*O Breiz ! ma bro ! me gar ma bro ;
 Tra ma vo 'r mor 'vel mur 'n he zro
 Ra vezo digabestr ma bro !*

2. Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed,
 N'eus bro all a garan kement 'barz ar bed ;
 Pep menez, pep traonienn d'am c'halon zo ker :
 Enno 'kousk meur a vreizad taer !
3. Ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv ;
 N'eus pobl ken kalonek a-zindan an nenv ;
 Gwerz trist, son dudies a ziwan eno ;
 O ! pegen kaer ez out, ma bro !
4. Mar deo bet trec'het Breiz er brezeliou bras,
 He yez a zo bepred ken beo ha biskoaz ;
 He c'halon virvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz,
 Dihunet out breman, ma Breiz !

TALDIR.

Gwir Vretoned

Marziale

Gwir Vre - to - ned, tud a ga - lon, war - zao!

Da ga - na gloar da Vreiz hor bro, Ha da zi
wall ten zor he bu - ga - le: Ar yez, ar peoc'h, al
li - ber - te; War zao! war zao! Da ga - na 'boutez
penn: Breiz da vir - vi - ken! Breiz da vir - vi - ken!

O va Breiz, gant da dou - riou bru - det, Da vor glas
ha da ve - ne - zious, Da vrug ruz ha da lann a
- laouret, Te 'zo kont dreist an holl vro - iou!

DISKAN :

*Gwir Vretoned, tud a galon, war zao !
Da gana gloar da Vreiz hor bro,
Ha da ziwall tenzor he bugale :
Ar yez, ar peoc'h, al liberte.
War zao ! war zao !
Da gana 'boutez penn :
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !* } d. w.

1. O va Breiz, gant da douriou brudet,
Da vor glas ha da veneziou,
Da vrug ruz ha da lann alaouret,
Te 'zo koant dreist an holl broiou !
2. Ne deus ket, 'vel e-touez hor c'herreg,
A dud vat, seder ha nerzus ;
Ne deus ket, 'vel en hor brezoneg,
Soniou drant, gwerziou dudius.
3. Hon tud koz, tud leal ha santel,
Start evel an dero kalet,
A ouezas miret da Vreiz-Izel
He brud vat, he nerz, he gened.
4. Bretoned, savomp hor c'halonou,
Ha touomp e tale'himp atao
Da vale war roudou hon tadou,
Keit ha ma 'z ay ar bed en-dro.

P. TRÉOURÉ.

Kanaouenn al Labourerien-douar

A - rok ma sav an heol, Hi a zav
 hep glac'har, La - bou - re - rien Dou - ar Ha
 gant daou - arn ner - zus — E kro - gont
 en - a - lar E - vit trei ar bom - mou, —
 'Lec'h ma vo ed - dis - par. —
 Ah! — Ah! — Ah! — Ah!

1. A-raok ma sav an heol, i a zav hep glac'har,
 Labourerien-douar,
 Ha gant daouarn nerzus e krogont en alar,
 Evit trei ar boemmou, 'lec'h ma vo ed dispar.

2. Ar c'houezenn a ziver diouz o zal melenet
 Ha yaouank roufennet ;
 Rak a-raok o c'hozni, alies 'maint pleget
 Gant al labouriou start hag ar poaniou kalet.
3. 'Hed an deiz hag eul lodenn vras demeus an noz,
 Hep dihan na repoz,
 I a boagn hep 'n em glemm, war zouar ar barroz,
 Tud yaouank ha merc'hed, ha paotred erru koz.
4. Met n'eo ket ken garo ma lavarer breman,
 Lec'h all ha dre aman,
 Ar blanedenn lakaet d'ar c'houer war ar bed-man ;
 M'en deus kalz a drubuilh, alies en deus joa.
5. Alies e trido e galon en e greiz,
 Pa welo, 'bars o Breiz,
 Ar parkeier leuniet gant seblant vat e-leiz,
 Hag o tiwan founnus, foenn, kerc'h, gwiniiz hag heiz.
6. Pa welo frouez melen 'leiz e wez avalou,
 Dre-holl er gwerjezou,
 Ha gant patatez kaër, karget puilh e barkou ;
 E-trezek an Nenvou ez ay e bedennou.
7. Ha d'an noz pa zeuio en-dro d'e di bihan,
 Pe e vo goanv pe hanv,
 Laouen e vo bepred 'n eur gavout 'tal an tan
 E wreg, e vugale, o c'hortoz anezan.
8. Hag e vesaerien-saout, kouls hag e vevélien,
 Kousket 'n o gwele foenn,
 A hunvreo d'an deiz ma vezint merourien,
 Ganto eur plas bennak hag eur yalc'h gwenneien.

9. A ! tud diwar ar maez, grit fae war ar re-ze
 Lakizien giz neve !
 A garfe ho kwelout o tilez ho tanve,
 'Vit beza o sklaved hag hanteri gante.
10. A ! tud diwar ar maez, chomit e-barz ho pro
 Start evel an dero ;
 Ma 'z eus nebeut arc'hant, frankiz 'zo tro-war-dro,
 Ar vuhez 'zo dousoc'h... ha dousoc'h ar maro.

TALDIR.

EVESAIT. — Ar poz diweza a c'heller ober an diskan gantan.

Son ar Falc'herien

1. Va zelennig chenchomp a don (bis)
 Lezomp hor gwelvan, hor c'haon.

DISKAN :

O ia da
 Kanomp gant joa,
 Eur ganaouenn
 D'ar falc'herien.

2. Ar falc'her paour a zav mintin (bis)
 Abred ez a' gant e ribin.
3. Alies kerkent diou ha teir eur (bis)
 Eman war zao ar c'hêz falc'her.

4. E bater neuze, a lavar (*bis*)
Ne vez ket hir, an holl her goar.
5. Mont ra en hent drant ha seder (*bis*)
Rak eur pôtr krenv eo ar falc'her.
6. Gant e vorzol hag e anne, (*bis*)
Me gred en deus eun tamm fouge.
7. Va mèn 'zo mat, va falc'h 'zo lemm (*bis*)
N'eman ket ar c'hal war he dremm.
8. Asa, pôtre, holl 'maomp aman (*bis*)
Piou 'vo hirio an diwezan ?
9. Abarz staga, ar c'habiten (*bis*)
A denn e dog, 'ra eur bedenn.
10. Goude 'tap krog er mèn lemman, (*bis*)
An holl bôtred 'ra evel dan.
11. Setu 'n holl flc'hier o sini (*bis*)
Asa pôtre ? Kouls eo kregi.
12. Er foenneg ne vez mui klevet, (*bis*)
'Met trouz ar flc'hier o redet.
13. Pa vez an deiz o c'houlouoi (*bis*)
Ar falc'herien 'zo a-zevri.
14. Eur blijadur eo o gwelet (*bis*)
Pa vezont war gorf o roched.
15. O falc'h a ra eun hanter-tro (*bis*)
Ar foenn a strinkont diouto.
16. Ar streo a zav evel kaeou (*bis*)
Ar bôtred 'zo ruz o fennou.



17. Rak war ar gliz eo, peurvuia, (*bis*)
E klaskont holl en em èsa.
18. An dour a red 'teid an elgez, (*bis*)
Met chom a-drenv biken jamez !
19. Hardi pôtre, chachomp ato (*bis*)
D'ar foenneg vras greomp he baro.
20. Erru Mari-Jan gant dijuni (*bis*)
Leiz ar chaodel a zo ganti.
21. Al loaiou beuz a c'hoari mat (*bis*)
Buan eo rinset ar bodezad.
22. Goude-ze 'krogont adarre, (*bis*)
Mont a reont yud e teid ar strev.
23. Evelse 'tremen an dervez (*bis*)
E-kreiz al labour hag ar prez.
24. Gourvez a ra ar c'hêz falc'her (*bis*)
E gorf brevet gant ar skuizter.
25. Ankounac'haat a ra e boan (*bis*)
O trebi kig ha fars d'e goan.
26. Eurus an den o labourat (*bis*)
P'en deus feiz ha bolontez vat.
27. Da Zoue e kinnig e boaniou (*bis*)
E c'houezenn hag e labouriou.
28. Er baradoz e tiskuzo (*bis*)
Eur gurunenn en deus eno.

LOUIS PAGE.



EVESAIT. — Aes eo kaeraat ar zon-man en eur lakaat war al leurenn-c'hoari tri pe bevar faotr-yaouank, ganto o dilhad-labour hag eur falc'h, hag a zrevezo ar falc'herien dre ma vo kanet ar zon.

Kousk Breiz-Izel

Andantino



Diskan



1. An heol a zo kuzet, setu echu an de,
Me 'glev ar c'hloc'h o tintal an Ave;

DISKAN :

*Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,
Setu an noz o tont war an douar.
Kousk, Breiz-Izel, bro ker mat,
Trouz ar mor bras a zav d'az luskellat.*

2. C'houez vat an ed e bleun hag al lann alaouret,
War ar maeziou, gant ar gliz noz, a red.
3. Ar bastored a gan, o tastum o loened ;
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.
4. En traoniennou didrouz, me glev kan an eostig ;
Telenner noz, sonit flour ha dousik.
5. Us da Vreiz o skedi, an nenv steredennet
A lar 'z eus eun Doue ouz hor c'haret.
6. An neb a c'houez bemdez a c'hounit e repoz,
D'an dud vat Doue en deus graet an noz.
7. Arvor, o douar sakr, a greiz kalon m'ho kar ;
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar !

J. MARÉCHAL.

An Daou Varz

Andantino

Barz an Ar . vor, la . var d'in - me : Kaer eo da
vro 'vel ar me . ne? Vel ar me . nez da c'hou . lou -
deiz, Han . ter - gu . zet — din . dan ar gliz.

1. *Barz ar Menez :*

Barz an Arvor, lavar d'in-me :
Kaer eo da vro 'vel ar mene ?
'Vel ar menez da c'houlou-deiz,
Hanter guzet dindan ar gliz.

2. *Barz an Arvor :*

Mar deo ken kaer ho menezioù
Da vintin gant ar glizennou,
Kaeroc'h ar mor alaouret holl,
D'an abardaez, pa guz an heol.

3. *Barz ar Menez :*

Tud an Arvor ne glevont ket
Kan dudius al laboused,
Sut ar voualc'h, kan an eostig,
Hini an drask, ar boc'h-ruzig.

4. *Barz an Arvor :*

Nann, ni ne glevomp peurvuia
Nemet gwennili o lenva,
Met ni gar o c'hlemm hirvoudus
Hag o c'hournij troidellus.

5. *Barz ar Menez :*

Er menez ez eus gwez uhel
D'hor goudori diouz an avel ;
E skeud brankou hor gwez dero
En hanv hor beus disheclienno.

6. *Barz an Arvor :*

Ma n'hon eus ket a wez dero,
Gwiniz melen 'zo en hor bro,
Ha sourral a reont goustadik
Dindan alan an aezennig.

7. *Barz ar Menez :*

Daoust ha c'houi ho peus foenneier
Marellet gant bokejou kaer ?
Feunteunioù sklaer ho peus ive
O rei dour mat d'an dud bemde ?

8. *Barz an Arvor :*

Ma n'hon eus ket a foenneier
Na kement a vokejou kaer,
Ar bizin druz dantelezet
Ouz hon reier ne vankont ket.

9.

O vale war an aod gwenn-kann,
Dirak ar mor bras ha plean,
Gant plijadur me 'zonj bemde
E braster an Aotrou Doue.

10. *Barz ar Menez :*

Ha c'houl a glev mesaerien
O kana seder ha laouenn,
En o menezion o viret
Bandennou bras a loened ?

11. Kaer eo sonig ar mous bihan
Pa vez o tont war-zu e goan,
Gant e vouezig sklaer ha skiltrus,
A-raok ma son an « Angelus ».

12. *Barz an Arvor :*

Allas, mignon, hor soniou-ni
Eo trouz ar gwall-vor o c'hoari,
Pa vez o strinka eonenn
Dre nerz estlammus ar wagenn.

13. Koulskoude hor martoloded
En o bagou a vez klevet,
Eur wech an amzer, o kana
Kantig an Itron-Varia.

14. *An daou varz asambles :*

Kaer an Arvor, kaer ar Menez,
Kaer eo hor Breiz, hor c'harantez ;
Hon telennou ne skuizint ket
O kana bro goz ar Varzed.

15. Ha pa vo nijet hon ene
Eus Breiz-Izel war-zu an Nenv,
Er baradoz c'hoaz ni 'gano
Bro ar rec'hier hag an dero.

LOUIS PAGE.

An Tri « Angelus »

Allegro

Sa . vet, sa . vet, Bre . to . ned, Se tu ar Mintin o
to . net, An An . je . lus a zo so . net, 'Barz en lein an
tour. Ar parkou, an tre . va . jou, Al li . or . zou hag ar
prajou Ar gwaremmou hag ar c'hoajou A c'halv'd'al la .
bour. Kro . gomp holl . gant hon de . vez, Ka .
somp al . loc . ned er . maez, Har . di, me . vel ha
ma . tez, Holl d'en em zi . kour. Sa . vet, sa . vet, Bre .
to . ned, Se . tu ar Min . tin o to . net An
An . je . lus a zo so . net, 'Barz en lein an tour.

1. Savet, savet, Bretoned,
Setu ar mintin o tonet,
An *Angelus* a zo sonet
Barz en lein an tour.
Ar parkou, an drevajou,
Ar gwaremmou hag ar prajou
Al lanneier hag ar c'hoajou
A c'halv d'al labour.
Krogomp holl gant hon devez,
Kasomp al loened er maez,
Hardi, mevel ha matez,
Holl d'en em zikour.
Savet, savet, Bretoned,
Setu ar mintin o tonet,
An *Angelus* a zo sonet
Barz en lein an tour.
2. Poaniet, poaniet, Bretoned,
Setu ar c'hreisteiz o tonet,
An *Angelus* a zo sonet
Barz en lein an tour.
Pep-hini a gemero
Kalon da doulla e ero,
Hag ar c'horfou a vo dero,
Pa vint el labour.
Pa ziwanc an hadenn,
Ar bed en do bara melen ;
Pa zarevo an avalenn,
Vo evet jistr flour.
Pcaniet, poaniet, Bretoned,
Setu ar c'hreisteiz o tonet,
Barz en lein an tour.

3. Kousket, kousket, Bretoned,
Setu an noz du o tonet,
An *Angelus* a zo sonet,
Barz en lein an tour.
Hadet eo an drevajou,
Falc'het eo bet ar prajou,
Diskouret eo ar c'hoajou
N'eus bet den leizour.
Echuet eo an dervez,
Prennet eo an tiegez,
Skuz eo mevel ha matez,
Fin 'zo d'al labour.
Kousket, kousket, Bretoned,
Setu an noz du o tonet,
An *Angelus* a zo sonet,
Barz en lein an tour.

Me ho salud, tud a galon

Allegro

Me ho sa . lud tud a — ga . lon,

Fleurenn yaou . an . kiz ar — c'han . ton,

Me ho sa . lud tud a — ga . lon,

Fleurenn yaou . an . kiz ar — c'han . ton, A ra e .

. nor d'ar vro — vre . ton, Hag a zalc'h u . hel

ho pan . niel! Hag a zalc'h u . hel ho pan

. niel, En des . pet da yud an — a . vel!

1. Me ho salud, tud a galon, } *d. w.*
 Fleurenn yaouankiz ar c'hanton }
 A ra enor d'ar vro vreton
 Hag a zalc'h uhel ho panniel,
 Hag a zalc'h uhel ho panniel
 En despet da yud an avel!
2. En despet d'an avel gwalarn, } *d. w.*
 Ni 'jomo bepred dorn ha dorn, }
 Ha ni 'welo, eus a hep korn,
 Tud e-leiz o tont d'an arme; (*d. w.*)
 'Vit difenn gwiriou ar c'hontre.
3. Evit difenn ar Brezoneg, } *d. w.*
 Ken enorus hag ar Galleg, }
 Ar bihana vo kalonek,
 Hag an distera 'vo nerzus; (*d. w.*)
 Rak souza 'drenv a ve mezus.
4. Kement Breton a zo d'eomp kar, } *d. w.*
 Kement Bretonez 'zo d'eomp c'hoar, }
 Ebarz ar vro-man omp holl par,
 Dre 'n em zikour 'n eil egile; (*d. w.*)
 Breiz vo gloriuz hep dale.

TALDIR.

Minorez Penn-ar-Roz

Marcia $\text{♩} = 112$

Solo

Fur. chet am eus pe. var c'han. ton O klask eur

Solo

plac'hig a fe. son, Eur plac'hig fur ha

Tutti *Solo*

di. damall, O ge, o ge, o ge, Eur

Tutti

plachyaouank a c'hizgwechall, Kanomp ge! —

1. Furchet em eus pevar c'hanton
O klask eur plac'hig a feson,
Eur plac'hig fur ha didamall,
O ge, o ge, o ge!
Eur plac'h yaouank a c'hiz gwechall.
Kanomp ge!
2. E Penn-ar-Roz, war a glevan,
Eman an hini a glaskan.
Hag e kollfen amzer ha poan,
Fenoz d'he gwelout mont a ran.
3. — « Eurvât ha joa 'barz an ti-man,
« Debret eo koan. war a welan. »

— « Ya, va den mat, debret eo koan,
« Deuit 'ta, mar plij, da dal an tan. »

4. — « Savit, war grêc'h 'ta, den yaouank,
« Azezit aze, war ar bank. »
— « Trugare d'eoc'h, va zintin vat;
« Deuit, va yontr, lakit eur c'horniad. »
5. Hag ar paotr koz da gozeal,
Me 'zelaoue en eur luchal
Ouz ar plac'h yaouank 'zo aze,
He hegel hir ouz he c'hoste.
6. N'em boa ket he gwelet biskoaz
En dansou nag er foariou bras;
He ble-o n'oant ket bet troc'het,
Brao war he zal e oant rannet.
7. Gwech ha gwech all ha d'ar c'houlz vat,
Eur gomz a boell ha plasêt mat.
O ! ma 'm bije kredet goulenn
Ober ganti eur gontadenn.
8. Met penaos kuitaat ar paotr koz
Pa ne oa fin ebet d'e gêz.
Ha setu sonet eunnec eur...
Gwall boent eo distrei d'ar Gerveur.
9. — « Nozvez evurus, kenavo !
« Hep dale me a zistroio. »
Ya, distrei a rin alies
Kavet em eus va gwir vestrez.
10. Ha ma ve heuliet va menoz
Prest vezo friko Penn-ar-Roz.
Ya ma ve heuliet va menoz
Prest 'vo friko e Penn-ar-Roz.

KOULMIG ARVOR.

Son ar plac'h bihan

Andantino

Al laboused a gan, — an heol a zo laouen; —
 Pegen kaer ar maeziou gant o bleuniou melen, oh!
 Pegen kaer hor me. ziougant o bleu. niou — me. len!

1. Al laboused a gan, an heol a zo laouenn;
 Pegen kaer ar maeziou gant o bleuniou melen, o!
 Pegen kaer ar maeziou gant o bleuniou melen!
2. Pegen kaer d'ar pastor c'hoari el lanneg vras,
 Pegen kaer d'an ale'houeder nijal en oabl glas.
3. Ha d'in-me, plac'h bihan, kas lein d'an eosterien,
 En eur gana dibreder 'hed ar wenojenn.
4. Aze, er parkad ed, 'man Yannig, va mignon,
 Eur paotrig mat ha krenv ha leal e galon.
5. Me 'm eus tost da gant skoued ha Yannig en deus daou,
 Pa deuo gouel Mikael ni 'skrivo 'n embannaou.
6. Prenet e vo eur vioc'h ha savet eun ti plouz,
 E-kichen ar feunteun, en draoniennig didrouz.
7. Eno pell diouz ar bed hag holl d'he c'harante
 Plac'h bihan Breiz-Izel a gano noz ha de.

KOULMIG ARVOR.

Son ar Goulenn-Eured

Marsiale

Bon-jour, bonn'femm', roit ho merc'h d'in, oh! Bon-
 jour, bonn'femm', roit ho merc'h d'in, oh! Bon-
 jour, bonn'femm', roit ho merc'h d'in, Ne vo ket
 ma-leürus gâ-nin. Bon-jour, bonn'femm', roit ho merc'h
 d'in, Ne vo ket ma-leürus gâ-nin.

1. Bonjour, bonn'femm', roit ho merc'h d'in, o! (d. w.)
 Bonjour, bonn'femm', roit ho merc'h d'in, } (d. w.)
 Ne vo ket maleürus ganin.
2. Me yay d'ar park da labourat;
 Hi 'jomo 'r gêr da luskellat.
3. Da luskellat ha d'ober tan,
 Da domma yod d'an h'ni bihan.
4. Me 'vo kontant 'fin ar zizun
 Ma c'hellan kaout va zamm butun.

5. Eun tamm butun ha dek gwenneg,
N' c'houlennin ken digant va gwreg.
6. Ha me 'vo fur betek mervel,
Ma c'hellan kaout ho merc'h Katell.
7. — Va faotrig kaez, va merc'h Katell,
N' vo ket roët d'eun den diboell.
8. D'eun den diboell, d'eur feneant,
D'eul lonker chistr ha gwin-ardant.
9. Ar bleo 'zo savet en da zourn,
Kae d'o rosta 'barz an ti-fourn.
10. Da c'hodellou 'zo goullou-sac'h ;
Kae d'eul lec'h all da glask eur plac'h !

Yannig ar mil micher

Me eo Yannig ar mil micher, Me eo Yannig ar
mil micher. A . na . vet mat gant ar vi . zer.
Hop! Heil! Tra la la la la la la la
la la la la la la la la la la. —

1. Me eo Yannig ar mil micher (*bis*).
Anavet mat gant ar vizer.

DISKAN :

*Hop, hei tra la la, la la la la,
La la la la, la la la la, la la.*

2. Brudet dre holl war an douar,
Biskoaz n'em eus kavet va far.
3. Eur vestrez koant am eus choazet ;
Mont a ran lies d'he gwelet.
4. D'he gwelet betek ti he zad :
Eur c'hastell plouz e korn eur c'hoad.

5. Neuze eur c'horn 'barz va genou,
Me 'gomz d'ezi eus va madou.
6. Me am eus eur c'hog hag eur yar,
Eur garrigell hag eur c'hoz karr ;
7. Eur skabell-goad, eur bank-fosell,
'N eur lochig tro, prest da goueel ;
8. Eur c'hi, eur c'haz hag eur c'havrig...
Gwell chans ne gavi ket plac'hig !
9. Setu aze roll va madou,
Klevit breman va micheriu :
10. Me a zo kloc'her ha sakrist,
Butuner mat ha lonker jistr ;
11. Kemenerig, kozeer flour,
Ha miliner, laer 'vel an dour ;
12. Boutaouer-koad ha kereer,
Dibuner neud ha pilhaouer ;
13. Marc'hadour moc'h, marc'hadour saout ;
Da laerez kezeg 'z oun eur maout !
14. Barner hag archer 'ven ive
Pa ne c'haloupan arôke.
15. Pa fell d'in bevan eus va rent
Me glask va boued e tro an hent.
16. Eus a belec'h 'ta, Marivon,
Ho po gwell fortun evidon !

KOULMIG ARVOR-

Fanch ar Paotr krenv

Allegretto

Fanch ar pôtr krenv hag e vi . gnon Oa tont d'ar

Diskan

gêr euz ar par . don Tra la la, la la la la

la la . lam tra la la, la la la . lam tra.

1. Fanch ar paotr krenv hag e vignon
Oa 'tont d'ar gêr eus ar pardon.

DISKAN :

*Tra la la, la la la la la,
Lalam tra la la, lalam tra.*

2. Digouezet ganto tri aotrou,
Bet o vale war ar maeziou.
3. Ar re-man 'zouge levitenn,
Tok kern-uhel war gern o fenn ;
4. Chupenn lost-pig ha bragou berr,
Gouest d'ober mez d'ar c'hemener ;
5. O moustachou a oa siret,
Frizet, tronset ha pomponet ;
6. Hag en o dourn bep a vaz skanv,
'Gasent en-dro en eur ganan.

7. Ha pa weljont an daou baotr mat,
En em lakajont d'o goapaat :
8. « Les pommes de terre pour les cochons,
Les épluchures pour les Bretons ! »
9. « Petra 'deus c'hoant, eme Fanch krenv,
Da baka 'n tri lakipod-se ? »
10. Hag hen mont d'ezo goustadik,
Ha tapa krog en o lost pig ;
11. Gant eun taol dourn war greiz e gein,
E strink unan war eur bern mein ;
12. Gant eun taol dourn diwar e fri,
E strink eun all e-touez ar pri ;
13. Gant eun taol troad diwar e... ler,
E strink eun all e-barz ar ster.
14. « Me 'zesko d'eoc'h, eme Fanch krenv,
Dont d'ober goap ac'hanoun-me. »
15. Ha neuze Fanch o vont d'ar gêr,
O kana son ar pilhaouer !

LAOUIG.

Son ar Pilhaouer

Allegretto



Mari . vo . nik 'zodi . me zet Gant eur c'hoz tam pilhou .



aer, Gant eur c'hoz tam pilhou . aer, E Loc . queffret ez eo

Diskan



ga . net E Ko . manant Toul - al - Laer . Foei, foei,



foei, Va zammik aotrou, Gant e stoub Hag e bil hou'

1. Mariyonig 'zo dimezet
Gant eur c'hoz tamm pilhaouaer, (d. w.).
E Lokefret ez eo ganet
E koumanant Toul-al-laer.

DISKAN :

Foei, foei, foei,
Va zammik aotrou } (d. w.)
Gant e stoub
Hag e bilhou.

2. Antronoz dervez an eured,
E oa foar e Landerne ; (d. w.)
Ha va lapous, prim dihunet,
Dao er maez eus e wele.

3. Drailha 'ra eun hanter pater,
Tana 'ra e gorn-butun ; (*d. w.*)
Hag en hent, gant e grog-pouezer,
Da bourmen 'hed ar zizun.
4. 'Hed ar bloaz, kenkouls lavaret,
'Vez atao o redek bro, (*d. w.*)
Hag e lez e wreg glac'haret,
Er gêr da skuilha daero.
5. Pa vez echuet e droiou,
'Teu d'ar gêr 'tao mezo dall, (*d. w.*)
Darbet d'ezan koll e vragou,
E Landerne, en deiz all.
6. Pa deuiou lezenn, er vro-man,
Da derri an eureujou, (*d. w.*)
Monig a yay, en eur gana,
Pell diouz paotred ar pilhou.
7. Pa deuiou karrig an Ankou
D'ober trouz dre ar vro-man (*d. w.*)
Monig a yay war e roudou
Hag her pedo d'e zamma.
8. Pa vo maro he zamm aotrou
Ha lipet gantan e loa, (*d. w.*)
Monig, e-lec'h lezel klemmou,
A gano : « d'an toull ez a ».

Gwir Vreizadenez

WAR DON : *Ar Pilhaouer* (p. 41).

1. Gwisket evel hon dugezad
Plac'hed Breiz, na c'houi 'zo kôant ! (*d. w.*)
Henvel ouz ar rouanedez,
D'ho lakaat hon defe c'hoant.

DISKAN :

Plac'h yaouank, merc'hed dimezet } *d. w.*
Chomit holl Breizadenez.

2. Gant ho koefig ken kaer toullet,
Gwintet war gernig ho penn ; (*d. w.*)
A-wechou war bleo rodellet,
Staget evel eskell gwenn.
3. Gant ho kemzou dantelezek,
Kinklet brao ho korfennoù ; (*d. w.*)
Gant ho tavanherou seizek
Ha boulouz ho lostennoù.
4. Kofigou ho kar dam-guzet,
Troadig mistr ha skanv pa gar... (*d. w.*)
E gwirionez bravoc'h merc'hed
Ne gavo ket neb a gar.
5. Distagit atao brezoneg
Yez ho mammou, yez ho Preiz. (*d. w.*)
En em voaza re d'ar galleg
En hor bro ne ve ket reiz.

6. Argasit pell eus hon touez,
Pa gorollit holl e tro, (*d. w.*)
An dansou mezus ha gouez.
Dansit hervez giz ar vro.
7. Ma c'hoarit hoc'h Itronezed,
Ne viot ket karet da vat. (*d. w.*)
Hep mar e vezot dilezet
Gant paotred yaouank ho kwad.

BROGAROUR

Ar wir Vreiziz

Ton : *An hini goz.*

1. Foei d'ar Breizad en defe mez
O komz ar brezoneg, e yez !

DISKAN :

*Ni 'gar hor bro, holl a-grenn ;
Ni 'zo Breiziz penn-da-benn.*

2. Hag e ve garm pe nec'hamant
Ni 'zoug enor d'hor gwiskamant.
3. Ni 'gan laouen, ni 'gan atao
Hor c'hantikou, hor soniou brao.
4. Ma vez korollet c'hoaz e Breiz,
Ne vo ket hon dansou direiz.
5. Ni 'venn degas ar c'hiz endro
D'hon dansou koz, dansou hor bro.
6. Koant eo Breiz gant he menezioù,
Gant mantell glazvez he maezioù.
7. Gwech o lipat, gwech all a-gas,
Ar mor a c'houriz-hi gant glas.
8. Dre-holl eo bet skignet he brud,
Gant istor taoliou-kaer he zud.
9. Ma tougomp karantez d'hor Breiz,
Kalz gwelloc'h e karomp hor Feiz.
10. Enep ar bed, enep ar c'hiz,
D'hon tenzorioù ni 'zalc'ho striz.

BROGAROUR.

Ar C'hernevad bihan

Moderato

E - war ar maez e bro Ger.ne, Du-hont e - kichen
 Kemper.le, Eur sul.vez vin.tin me 'gle.ve: Eur
 be . a . jour eus a Ba . ris, Ti hou hou Gant
 eur Brei . za . dig o ti . viz, Ti hou hou hou.

1. E war ar maez, e Bro Gerne,
 Du-hont, e-kichen Kemperle,
 Eur zulvez vintin, me 'gleve
 Eur beajour eus a Bariz — Ti-hou-hou,
 Gant eur Breizadig o tiviz. — Ti-hou-hou-hou.
2. — « Te 'zo meurbet faro 'velse,
 Krennard yaouank, lavar d'in-me,
 Petore Bro eo da vro-te ? »
 — « Me 'zo Breton, me 'zo Breizad,
 A greiz kalon, evel ma zad ! »
3. — « Lemm ez eo da zaoulagad glas,
 Met perak eta 'tougez c'hoaz
 Eur chupenn verr, eur bragou bras ? »
 — « Me 'gar ma Bro, me 'gomz he yez,
 Me 'zoug he gwiskamant hep mez ! »

4. — « Da vleo ken hir ha rodellet
 A zo koantik, ret eo laret,
 Met ar c'hiz-se 'zo tremenet ! »
 — « Me 'droc'ho ma bleo pa garin ;
 Ho pleo 'zo d'eoc'h, ma re 'zo d'in ! »
5. — « Aman ken pell diouz levez
 Ar c'hêriou bras, 'hed an devez,
 Te 'dle hirvoudi alies ? »
 — « Me 'blij d'in sioulder ar maeziou
 Muioe'h eget trouz ar c'hêriou ! »
6. — « En kêr e weler, niverus,
 Tier pinvik, ruiou poblus,
 Ilizou kempennet skedus ! »
 — « Gwelloc'h eo d'in ma zi bihan,
 Hon henchou doun, hon touriou moan ! »
7. — « Ganin, mar karez dont e-kuit,
 En kêr Bariz, me 'gavo d'it,
 Leiz da zourn, arc'hant da c'hounit ! »
 — « Gwelloc'h eo d'in chom aman paour,
 'Get mont 'lec'h all da zastum aour ! »
8. — « Neuze 'ta, paotrig, kenavo !
 Rak me 'renk c'hoaz mont d'ober tro
 Treger, Leon, Gwened, Goelo ! »
 — « Vel-se, teskfet penaos, e Breiz
 Ez eus c'hoaz gwir Vreiziz, a-leiz. »

EVNIG PENN AR C'HOAD-

Ar Mevel bras

Vif

Sel . lit du . ze 'barz er prad glas Ju . lik ar ver .
 - vè - ro, O troc 'ha foënn ar me . vel
 bras Ju . li verton . ti, Ju . li verton . ton, Ju . lik ar ver .
 - vè - ro, — Daou . la . gad ar c'houil de . ro!

1. Sellit du-ze 'barz ar prad glas,
Julig ar ververo,
O troc'hat foenn ar mevel bras.
Julivertonti, julivertonton,
Julig ar ververo,
Daoulagad ar c'houil-dero!
2. 'Spenn diou gammed 'raok ar re all,
E gorf evel eur c'hloc'h a vrall.
3. E falc'h 'zo lemm hag a lugern,
Hag ouz e dreid ar foenn a vern.
4. Touzet e vez rez an douar
Ha rodellet e vez dispar.

5. Mar deo eur falc'her ar Paotr-Yann,
N'eus ket e vestr da bilat lann.
6. Na da douch, dre an hent a gar,
Pevar a gezek ouz ar c'harr.
7. N'eus ket evitan da zougen
Eur zac'had ed bec'h da zaou zen.
8. Stad 'zo e kalon Yann Mevel
Pa 'z a da bardon Plonevel.
9. Soaz a gav brao e vorzedou,
'Zo prest da strakal e vragou.
10. Hag he zad a lavar d'ez :
— « Gantan e tlejes dimezi ! »

TALDIR.

Hob y deri dando

Me am boa eur ves-trez saozes,
 Hop i de-ri dan-do. Penn me-len, teod
 hir ha lu-chez, Yan-nig a gan a-tao;
 met pa gomz d'in eus di-me-zi Yan-nig Yann
 o nann ne rin ket ar fa-zi Yann gamm,
 paotr e vamm a glask be-pred ar gwel-la tamm,
 Yann gamm paotr e vamm en di-je ta-pet eur pez lamm.

1. Me am boa eur vestrez saozes,
 Hob y deri dando...
 Penn melen, teod hir ha luches,
 Yannig a gan ato !
 Met pa gomzen a zimezi,
 Yannig, yann,
 O nann, ne rin ket ar fazi.
 Yann gamm, paotr e vamm
 A glask bepred ar gwella tamm,
 Yann gamm, paotr e vamm,
 En dije tapet eur pez lamm !
2. Henvel oa he mouez o kana,
 Hob y deri dando,
 Ouz eur goz vioc'h o vleja,
 Yannig a gan ato !
 Pe ouz eur c'hoz ki oc'h harzal,
 Yannig, yann,
 Aet e damm askorn gant eun all.
 Yann gamm, paotr e vamm
 A glask bepred ar gwella tamm,
 Yann gamm, paotr e vamm,
 En dije tapet eur pez lamm !
3. Dreist ar mor e nij va c'halon,
 Hob y deri dando,
 'Trezek va mestrez ken mignon,
 Yannig a gan ato !
 'Trezek an ael a garante,
 Yannig, yann,
 A zo 'barz va zonzou noz de.
 Yann gamm, paotr e vamm,
 A glask bepred ar gwella tamm,
 Yann gamm, paotr e vamm,
 En dije tapet eur pez lamm !
 (Troet diwar ar c'hembraeg gant F. GOURVIL.)

Son ar c'hafe

Diouz kastel. Pôl da Lan-huon, Diouz Kerne da
 Oe . lo . A zo bet sa . vet meur a zôn
 War-benn an e . va . jo ; E . vi . doun, keit ha
 ma ve . vin, Me gav d'in a la . rin:
Diskan
 Ne . tra na blij d'in-me 'Vel eur banne ka . fe,
 * Ne . tra na blij d'in-me : 'Vel eur ban-ne ka . fe! ?

1. Diouz Kastel Paol da Lanhuon,
 Diouz Kerne do Oelo,
 Ez eus bet savet meur a zon
 War-benn an evajo ;
 Evidoun, keit ha ma vevin,
 Me gav d'in
 E larin :

DISKAN

Netra ne blij d'in-me } d. w.
 'Vel eur banne kafe ! }

2. Ar vamm, pa glev he bugel kaez
 O ouela 'n e gavel,
 Gant eun dakennig kafe laez,
 A ra d'ezan tevel ;
 Ha neuze diou vouezig vihan,
 A-unan,
 A vouskan : (*diskan*)
3. Pa 'z eas Fanch' ar paotr faro
 Da welet Godig vrao,
 E laras d'ezi : « Du-man 'zo
 Jistr ha gwin 'leiz ar c'hao ! »
 Met God a respontas hepken,
 D'ar paour den
 War he fien : (*diskan*)
4. E tiegeziou pinvidik
 Ez eo bet, a-viskoaz,
 Ar c'hiz servija kafe rik
 War-lerc'h ar prejou bras ;
 Aotronez hag itronezed
 A glevad
 O laret : (*diskan*)
5. Ar paour ive, 'mesk al ludu,
 En eur pod-pri faoutet,
 A domm eur banne kafe du,
 A-raok mont da gousket ;
 Hag hep sonjal 'n e baourente,
 'N e wele,
 Ec'h hunvre : (*diskan*)

6. Kenta evez ar martolod,
 Kerkent ha dihunet,
 Eo redek da zifenn e lod,
 'Raok ma vo holl evet
 Eus an dour du a ra d'ezan,
 'N eur leinan,
 Disklerian : (*diskan*)

7. Ar c'hafe 'zo eul louzaouenn
 Dispar dreist pep-hini ;
 N'hallfer ket en eur ganaouenn
 Kaer a-walc'h hen meuli ;
 Ma zon a vefe kalz re hir,
 Penegwir
 En eur gir : (*diskan*)

8. Me a varvo ivez, moarvat,
 Evel pep krouadur,
 Ha mar pe c'hoant, neuze, tud vat,
 D'ober d'in plijadur,
 War ma bez dister ho pedan
 Da skrivan
 Kement-man :

DISKAN DIVEZA :

'Vit eur paotr :

Mann d'ezan ne blije }
'Vel eur banne kafe. } d. w.

'Vit eur plac'h :

Mann d'ezi ne blije }
'Vel eur banne kafe. } d. w.

EVNIG PENN-AR-C'HOAD.

Son ar jistr

Ka.nomp hi.rio, ma migno.ned, Kanompwar an
 dro, Ar jistr koz hag ar jistr ne.vez
 Bru det e pep bro. Gwel.la e.vaj'zo er
 bed-man Hag ous.penn-ze ar yac'hu.san!
Diskan
 Taol ha taol! A.lo! pao.tred,jistr d'an daol!—

1. Kanomp, hirio, ma mignoned, kanomp war eun dro,
 Ar jistr koz hag ar jistr nevez brudet e pep bro ;
 Gwellan evaj 'zo er bed-man,
 Hag ouspenn-ze, ar yac'husan.

DISKAN :

Taol ha taol !
Alo ! paotred, jistr d'an daol !

2. Ar jistr mat, gwad an avalou, sklaer evel dour aour,
'Dorr e zec'hed d'ar pinvidik kenkouls ha d'ar paour ;
D'an dud vras ha d'ar vugale,
E ro nerz, ya, 'leiz o jave.
3. Ar jistr dous a garg a furnez penn ar yaouankiz ;
D'hor merc'hedou e ro ive gened ha koantiz ;
Douster a laka 'n o zellou
Ha karantez 'n o c'halonou.
4. Ar jistr mat a zo burzudus evit ar gozni ;
Netra ne argas evel dan an drouz-izili ;
D'hen evan mar gallfemp derc'hel,
Birviken ne rankfemp mervel !
5. Pa vo deut hon tro, eun dervez, da vont d'ar bed all,
Diskennomp e karr an Ankou, hep ober gwad fall ;
Du-hont, pep-hini a gavo
Jistr da evan, 'r pez a garo !
6. Ra vezo ar jistr enoret, e Breiz a bep tu,
Hag ar gwin-ardant tanfoeltret gant ar malloz-ru !
D'hor bro garet trinkomp breman,
Rak ma goug 'zo krog da zec'han...

EVNIG PENN-AR-C'HOAD.

Klenned ar Vro

Lento

War.dro diwez ar brezel, ar bre.zel keneu.zus, A
za . vas en hon amzer 'tre Bro-C'hall hag ar Prus, E
Ge.nev, en hos.pi.tal, e oa, prest da ver.vel, Eur
rall.
paourkêz soudard yaouank ga.net e Breiz-I.zel.

1.

Wardro diwez ar brezel, ar brezel ken heuzus,
A zavas, en hon amzer, tre Bro-C'hall hag ar Prus ;
E Jenev, en ospital, e oa, tost da vervel,
Eur paour kaez soudard yaouank ganet e Breiz-Izel.

2.

E-keit m'en doa bet yec'hed da vont war an dachen,
En doa stourmet kalonek 'vel eur zoudard kristen ;
Met, an hini oa chomet bepred start en emgann
Gant ar riou, an dienez, voe diskaret buan.

3.

Setu hen koeuzet gwall glanv, kaset d'an ospital ;
Met eno, ouz e glenved, e stag eur c'hlenved all ;
Deiz ha noz da Vreiz-Izel e spered a zistro,
Ha gant e galon, siouaz, eman klenved ar Vro.

4.

Gwall start eo d'ezan mervel ker pell diouz harzou Breiz,
Ker pell all diouz e gerent, hag e lavar eun deiz :
« Araok mont eus ar bed-man, me 'm eus c'hoant ha c'hoant
Da welout da vihana va zad eur wechig c'hoaz. [bras

5.

Raktal e kaser kelou da dud ar zoudard kaez.
Neuze pebez kalonad ! Neuze pebez enkrez !
Koulskoude eun tamm fizians 'n o c'halon a zalc'hont :
Marteze n'eo ket kollet ; e dad 'yelo du-hont.

6.

An hent 'zo hir ha poanius : treuzi Bro-C'hall a-bez...
An tad ivez 'zo gwall goz... Mat ! mont a ra gant prez.
Dizale, a-bouez poania, setu hen digouezet,
E vab a zo dirazan... Eun druez e welet !

7.

Pa wel ar paour-kaez klanvour e dad en e gichen :
— « O va zad ker, emezan, breman 'varvin laouen ! »
— « Arabat d'it koll fizians ! » a respontas an tad,
— « Arc'hant am eus digaset, me breno d'it traou mat.

8.

— « Traou mat, eme ar c'hlanvour, o ! ne dalv ket ! Pell 'zo
« An traou ar gwella blazet am eus donjer outo. »
Hag e kouezas adarre skuiz-maro hag e dad,
Ouz e welout, a zave an dour 'n e zaoulagad.

9.

Ne ouie petra da ober, pa zeuas da zonjal
Ez oa chomet 'n e zilerc'h eun tamm bara zegal ;
Kinnig a ra anezan d'e vab 'n eur lavaret :
— « Set' aman eun tamm bara graet gant da vamm garet. »

10.

Kerkent ha mar deo koeuzet ar gomz-se 'n e skouarn,
Ar c'hlanvour, 'n eur vousc'hoarzin, a astenn e zaouarn :
— « O ! eun tamm d'in emezan, naon a zeu d'in brema
« Abaoe keit-all amzer n'em eus drebet netra. »

11.

Goude ar begad kenta e c'hoanta kaout eun all,
Hag eun all c'hoaz. Ar c'hlanvour betek neuze ker fall
A zant eman adarre e nerz o tont endro ;
Hen araok ken drouklivet a zeu d'ezan liou brao.

12.

Ha dalc'hmat e lavare, dre ma trebe eun tamm, [mamm !]
— « C'houekaot bara eo heman ! bara graet gant va
Bemdez azalek neuze ez eas brao war wellaat,
Ha dizale d'ar gêr e tistro gant e dad.

13.

*Eneou ar gristenien alies 'zo henvel
Ouz korf ar zoudard breizad ; dare int da vervel.
Ha ne deo ket eur zouez ; rak eleiz a z'ouer
Magadurez hon ene : Sakramant an Aoter*

14.

*C'hoant hoc'h eus c'houi da zerc'hel hoc'h ene beo ha
Gant ho mamm, ar gwir Iliz, eman bara an Nenv. [krenv ?]
Drebit alies anezan ha c'houi 'welo neuze
Peger c'houek eo d'ar galon, peger mat d'an ene.*

Kenavo !

Pe . det hon eus Sent koz hor Breiz, Ka .
 . net holl a - u . nan ha la . bouret a -
 hed an deiz, Eu - rus, gwi . ti . bu .
 , Diskan
 nan, Pao . tred yaouank 'raok mont d'ar gêr La -
 (Merc ' hed)
 . va . romp KE . NA . VO, a vouez u . nan . ka
 . nomp se . der KE . NA . VO KE . NA . VO.

1. Pedet hon eus Sent koz hor Breiz,
 Kanet holl a-unan,
 Ha labouret a-hed an deiz,
 Eurus, gwitibunan.

DISKAN :

*Paotred (Merc'hed) yaouank, 'raok mont d'ar gêr
 Lavaromp KENAVO !
 A vouez unan kanomp seder
 KENAVO ! KENAVO !*

2. Graet hon eus holl an hunvre kaer
 Da veza ebestel,
 Da lakat Jezuz Hor Zalver
 Da ren war Vreiz-Izel.
3. Kristenien start 'hed hor buhez,
 Bepred gwir Vretoned,
 War henchou Breiz, gant levez,ez,
 Ni 'gavo mignoned.
4. Pa vimp falc'het gant ar maro
 N'emaomp ket o c'hortoz,
 Jezuz hor Mestr a lavaro :
 Deut holl d'ar Baradoz.

F. GUÉGUEN.

Pedenn diouz an noz

D'an daou.lin ni a gouez, a raok ar
 c'hou.ket, O Sal.ver ar bed, se.tu
 ni! — Gant bec'h hor bu.hez fall omp gwas.ket;
 Ni hoc'h as.ped, o Tad, — d'hor par.do.ni.

1. D'an daoulin ni a gouez, a-raok ar c'houket,
 O Salver ar bed, setu ni!
 Gant bec'h hor buhez fall omp gwasket;
 Ni hoc'h asped, o Tad, d'hor pardonni.
2. Ma klask, evel eur bleiz, an diaoul hon taga,
 Distro-it e skilfou bepred;
 N'hel laoskit ket en noz d'hol laza,
 Gant ho skoazell ni 'vo hep droug ebet.
3. Santez Mari, sant Breiz ha santez Anna,
 Teurvezit hor ren deiz ha noz;
 Ma c'hellimp, ganeoc'h, mont da ranna
 An eurusted a bad, er baradoz.
4. Diwallit diouz peb droug mignonned, kerent;
 D'ar pec'her kaledet ha fall,
 Grit truez, daoust ma'z eo ken dizemt;
 Peoc'h erfin d'an anaon aet d'ar bed all.

F. GUIVARC'H.

TAOLENN

<i>War zao, Yaouankiz !</i> (F. Guéguen).....	3
<i>Yaouankiz</i> (F. Guéguen).....	7
<i>Kan-emzao an Y. K. A. M.</i> (F. Mévellec).....	10
<i>Bro Goz ma Zadou</i> (Taldir).....	12
<i>Gwir Vretoned</i> (Paotr-Treoure).....	14
<i>Kanaouenn al Labourerien-douar</i> (Taldir).....	16
<i>Son ar Falc'herien</i> (L. Page).....	19
<i>Kousk Breiz-Izel</i> (J. Maréchal).....	22
<i>An Daou Varz</i> (L. Page).....	24
<i>An Tri « Angelus »</i> (Taldir).....	27
<i>Me ho salud, tud a galon</i> (Taldir).....	30
<i>Minorez Penn-ar-Roz</i> (Koulmig Arvor).....	32
<i>Son ar Plac'h bihan</i> (Koulmig Arvor).....	34
<i>Son ar Goulenn-Eured</i> (N...).....	35
<i>Yannig ar mil micher</i> (Koulmig Arvor).....	37
<i>Fanch ar Paotr Krenv</i> (Laouig).....	39
<i>Son ar Pilhaouer</i> (N...).....	41
<i>Gwir Vreizadzed</i> (Brogarour).....	43
<i>Ar Wir Vreiziz</i> (Brogarour).....	45
<i>Ar C'hernevad bihan</i> (Evnig Penn-ar-C'hoad).....	46
<i>Ar Mevel bras</i> (Taldir).....	48
<i>Hob y deri dando</i> (F. Gourvil).....	50
<i>Son ar c'hafe</i> (Evnig Penn-ar-C'hoad).....	52
<i>Son ar jistr</i> (Evnig Penn-ar-C'hoad).....	55
<i>Klenved ar vro</i> (N...).....	57
<i>Kenavo</i> (F. Gueguen).....	60
<i>Pedenn diouz an noz</i> (F. Guivarc'h).....	62

Kemper, moulevez, 7, ru an Dudchentil.

INDEX

1. Introduction 1

2. The first part of the work 2

3. The second part of the work 3

4. The third part of the work 4

5. The fourth part of the work 5

6. The fifth part of the work 6

7. The sixth part of the work 7

8. The seventh part of the work 8

9. The eighth part of the work 9

10. The ninth part of the work 10

11. The tenth part of the work 11

12. The eleventh part of the work 12

13. The twelfth part of the work 13

14. The thirteenth part of the work 14

15. The fourteenth part of the work 15

16. The fifteenth part of the work 16

17. The sixteenth part of the work 17

18. The seventeenth part of the work 18

19. The eighteenth part of the work 19

20. The nineteenth part of the work 20

21. The twentieth part of the work 21

22. The twenty-first part of the work 22

23. The twenty-second part of the work 23

24. The twenty-third part of the work 24

25. The twenty-fourth part of the work 25

26. The twenty-fifth part of the work 26

27. The twenty-sixth part of the work 27

28. The twenty-seventh part of the work 28

29. The twenty-eighth part of the work 29

30. The twenty-ninth part of the work 30

31. The thirtieth part of the work 31

32. The thirty-first part of the work 32

33. The thirty-second part of the work 33

34. The thirty-third part of the work 34

35. The thirty-fourth part of the work 35

36. The thirty-fifth part of the work 36

37. The thirty-sixth part of the work 37

38. The thirty-seventh part of the work 38

39. The thirty-eighth part of the work 39

40. The thirty-ninth part of the work 40

41. The fortieth part of the work 41

42. The forty-first part of the work 42

43. The forty-second part of the work 43

44. The forty-third part of the work 44

45. The forty-fourth part of the work 45

46. The forty-fifth part of the work 46

47. The forty-sixth part of the work 47

48. The forty-seventh part of the work 48

49. The forty-eighth part of the work 49

50. The forty-ninth part of the work 50

51. The fiftieth part of the work 51

52. The fifty-first part of the work 52

53. The fifty-second part of the work 53

54. The fifty-third part of the work 54

55. The fifty-fourth part of the work 55

56. The fifty-fifth part of the work 56

57. The fifty-sixth part of the work 57

58. The fifty-seventh part of the work 58

59. The fifty-eighth part of the work 59

60. The fifty-ninth part of the work 60

61. The sixtieth part of the work 61

62. The sixty-first part of the work 62

63. The sixty-second part of the work 63

64. The sixty-third part of the work 64

65. The sixty-fourth part of the work 65

66. The sixty-fifth part of the work 66

67. The sixty-sixth part of the work 67

68. The sixty-seventh part of the work 68

69. The sixty-eighth part of the work 69

70. The sixty-ninth part of the work 70

71. The seventieth part of the work 71

72. The seventy-first part of the work 72

73. The seventy-second part of the work 73

74. The seventy-third part of the work 74

75. The seventy-fourth part of the work 75

76. The seventy-fifth part of the work 76

77. The seventy-sixth part of the work 77

78. The seventy-seventh part of the work 78

79. The seventy-eighth part of the work 79

80. The seventy-ninth part of the work 80

81. The eightieth part of the work 81

82. The eighty-first part of the work 82

83. The eighty-second part of the work 83

84. The eighty-third part of the work 84

85. The eighty-fourth part of the work 85

86. The eighty-fifth part of the work 86

87. The eighty-sixth part of the work 87

88. The eighty-seventh part of the work 88

89. The eighty-eighth part of the work 89

90. The eighty-ninth part of the work 90

91. The ninetieth part of the work 91

92. The ninety-first part of the work 92

93. The ninety-second part of the work 93

94. The ninety-third part of the work 94

95. The ninety-fourth part of the work 95

96. The ninety-fifth part of the work 96

97. The ninety-sixth part of the work 97

98. The ninety-seventh part of the work 98

99. The ninety-eighth part of the work 99

100. The ninety-ninth part of the work 100

101. The hundredth part of the work 101

